

YF_0055_An dilabour

pe distouelladeg an dud yaouank

Didostait kozh ha yaouank, didostait da gleved
Rag en ur sellet deus ho tele, c'hwi zo hanter mouget

Bep noz e vez kontet deoc'h, kelc'helou gaouierus (kelou)
Giz-se ne rit ket sonjou fall, ha chomit dinec'hus.

Ni oa kaset d'ar skolaj, evit deskin ur vicher
Hon zud 'n oa lavaret deomp, giz-se 'po ket mizer

Aet e oamp pell deus hon neizh, douget gant esperans
Gwelet 'peus ac'hanomp o vond, kement korn deus ar Frans.

Bolontez vat 'm'omp laket, e nerzh hon yaouankiz
Desket ha laouenaet, omp deuet war hon giz

Breman pa omp brudet mat, gant sertifikajou
E c'hellimp diskouez d'hon zud, pezh 'zo barzh hon pennou.

Bemdez emaoamp war an hent, abaoe omp deut en-dro
Evit klask ur plas bennak da labourat 'bar' vro

Pep lec'h ha m'omp tremenet, zo respontet deomp ni
C'hwi zo un tammig yaouank, da labourad d'am zi.

Koulskoude ar pennou bras, re ar gouarnamant
Neus lavaret abaoe pell zo, vefe mat dre aman

Sikourat pep micherour, peizant ha pesketaer
Da vagan e vugale, hep mont pell deus ar ger.

Komzou giz e vez klevet, kement seurt promesou
Pa dostae ar votadeg, da zaspun ar mouezhiou

Meur a gantved a zo tremenet, n'eus hini dishenvel
Bewech e vez kontet deomp, ar memes rimodell.

Tremeur BOURLES